

# Fichenn adwelet I. Europa hag ar bed enXVIIIvet kantved

## Europa hag ar bed en XVIII<sup>o</sup>s. / tem 1 ha 4: Europa er bed e-penn kentañ an XVIIIvet kantved ha trafikerezh sklaved

Gouzout a ran	• Geriaoueg	Galloud trevadennel, Produ manufakturet,Paramantour, terker,Marc’hadour, Monopol, Kotonajoù, Frankizad(idi), Torridigezh ar sklaverezh, Metropolenn, Kumpagnuniezh kenwerzhel, Morianetaer, Trafikerezh treuzatlantel, Ekonomiezh an plantadennoù, Kod du
	• Lec’hiiñ	-Gouzout lec’hiiñ ar <b>Stadoù gallodus en Europa hag o dalc’hoù(trevadennoù)</b> -An <b>impalaeriezhioù trevadennel pennañ</b> àr kartenn ar bed e-penn kentañ an XVIIIvet -Gouzout <b>an hentoù kenwerzhel-mor pennañ</b>
Koupabl on da	• Displegiñ • Studiiñ • Kontiñ	-Kontiñ <b>rol Bourdel</b> e barzh ar c’henwerzh en XVIIIvet -Un daolenn mor Vernet -Kontiñ <b>buhez ur sklav</b> (ar skaperezh, an dreuzadenn, al labour er plantadegoù)

**Galloud trevadennel:** Stad get tiriadoù aloubet ha renet getañ. Liammoù start e vez etre an drevadenn hag ar bennvro, ar Stad trevadennour.

**Produ manufakturet:** produ savet e-barzh ur manufaktur (uzin).

**Paramantour:** farder ha terker( aménager) listri kenwerzh hag a bourchas ivez kement tra evit bageal ha leviata(bleniiñ= piloter)

**Marc’hadour**= négociant, un den a bren produioù get ur c’hementad bras.

**Monopol:** chom hep kevezerezh

**Kenwerzh tric’horn:** kenwerzh ganet a-dal ar XVIIvet kantved etre Europa, Afrika hag Amerika.

**Kotonajoù**= Indianezed: lien e kotoñs livet pe moulet.

**Frankizad(idi):**sklav bet dieubet get e vestr.

**Torridigezh ar sklaverezh:** den pe pennad evit difenn groñs ar sklaverezh (abolitionnisme).

**Metropolenn:** Stad getañ un drevadenn.

**Kumpagnuniezh kenwerzhel:** embregerezh savet get marc’hadourerien evit diorren oberiantizoù kenwerzhel (hini an Indez en Oriant da skouer).

**Morianetaer** : den a ra trafikerezh sklaved ( galloud a ra bout ivez al lestr ).

**Sklav:** den kollet getañ pep frankiz, perc’hennet ma’z eo get ur mestr pe ur Stad.

**Trafikerezh treuzatlantel:** kenwerzh ha dezougen sklaved du a Afrika betek Amerika.

**Indigo:** plantenn implijet evit liviñ (e glas) dilhadoù.

**Ekonomiezh an plantadennoù:** sistem labour-douar diazezet àr tier-feurm bras a implij sklaved.